

Atelier war ar skrivañ

Gant Clyde Dluguy–Belmont ha Gégé Gwenn

Diouzh ar mintin e vo kinniget poelladennoù lec'h ma c'hello pep hini skrivañ un destenn war-dro 300 sin diwar an abeg kinniget.

Ar skridoù a vo lennet dirak ar re all ha pep hini a c'hello reiñ e ali pe sevel goulennoù.

Goude merenn, ar re o defe un destenn, e stumm un danevel, a c'hello labourat war o skrid gant alioù ar re all. Mod-all e vo kendalc'het gant ar poelladennoù.

Kinniget e vo ivez ar bloaz-mañ poelladennoù war « skrivañ kanaouennoù » ha kement all evit barzhonegoù.

Evel warlene e vo kinniget d'ar re a fell dzho embann o skridoù e-barzh ar gelaouenn « YA ! ».

EVEZHIADENN : Pleustret e vo war an danvez-se bemdez eus 9 eur betek kreisteiz hag eus 2 eur betek 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.

Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh temoù ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.